



# STOURM L'HAÏ

## COMBAT

ENTRE

## AR FRANCICHEN

HAG

## AR BRUSSIANET

en pad ar siej, tost da Baris



Silaouit, tud Breïz-Izell, ha c'hanon, me ho ped,  
Ha me ia d'ha lavared ar stourm oa n'eur gaved,  
Ha dostig d'ha gaer Bariz, nao-war-n'uguent ha zu  
Mil-eiz-cant-tri-uguent-dec, dre eun amzer goal du.

Ann avel he oa scorned, ann amzer he oa ien,  
Ar zoudardet ha rampled er sank bag er voulien  
Ann eïl zoudard lavare doustadik d'he guile :  
» Erru zeo tost ar maro, me enno cleo ho vale. »

Teïr eur oa nevez soned he barz enn Gentilli,  
Pa oa zoudardet iaouank guennoc'h evit lilli,  
Ho vale war zu kaer l'Haïs ag ho fennou saved  
D'ha glask ann enebourien ho dalc'he liammed.

Ar zoudarded deuz ar Pruss ha zalc'he anoezhe  
Evel ma rha ar c'hleved ann dud war ho guele,  
Ho derc'hell ha renn ha dost ne helleon ket fringall,  
Ar Roue Guillou ha boueze he vrec'h pouunner war Gall.

Dukro enn d'hoa lavared, enn devechou araog :

- « A barz eun neubend deiou avezo cur gœl greg
- « Enn tré ar Prussianed ha bugale hor bro,
- « Rac c'hoant emm beuz d'a veled deuz ar peoc'h ann distro
- « Dilezell ha ran Pariz, enn penn daou c'chant mil den,
- « Tri c'chant-mil ha chom henni evit ann eil loden,
- « Ha biken ne zistroan, me enn tou, d'ha Bariz,
- « Kenn amm bezo ho c'hassed d'ha Berlin war ho c'hiz.
- « Homp dere'hell ha fell dezhe enn kreiz eur c'heil houarn
- « Evel ma zalc'h aliez ann droug-chass al louarn,
- « Alaz ! red ezeo demp-ni ho zrec'hi pe mervel
- « Evel ma ra ar bleuniou p'ha c'houez an droug-avel.
- « Hoguen ma vefenn lazed, 'vel mar guellan beza,
- « Arabat v'ho ho espern, red ha v'ho ho laza,
- « Red avezo ho laza eb cayet tamm true
- « Rac inn azo noz ha de ho clask caout homp bue ! »

Ar zoudardet p'ho d'heoa ar guiriou-man cleved

Ha zilezaz kaer Bariz evel tud spouronned ,

Eun darn ha redaz ha glei sg eun darn all ha zeo,

Tanned siouaz ho fennou evel penn eun den meo.

Evel-ze enn eur gave, nao-war-n'uguent ha zu,

Darn bo vonned war zu l'Haï dre eun novez goal du .

Ann amzer he oa goal du, eneblec'h oa goulou

Nemet ha rhe zo hadet gant Doue enn envou.

ENN EUR VALE N'EUR GAVJONN DIRAG AR GAER HA L'HAÏ

DARN DIOUTE LAVARE BREMAÏK VANTAN ME C'HAÏ

ERR PENN KENTA BARZ ENN KAER D'HA GUEMER EUR BANIEL

AG ENN DALC'HINN HUELLOC'H, EVIT AR ZAOUT HO C'HERNIEL.

DEUZ MOBILET ACHU-DOUAR AR BEDERYED LODEN

ENN EUR GAVAZ AR C'HENTA D'HA ZIRAOU AR CHADEN,

ENN DRENCHADENNO HUEL-BRUK HE C'HORTOZENN ANN HEUR

D'HA SKEI, EVIT DISCAROUT AR'HE HA LAZ HO BREUR.

DARN DIOUTE HO DEVOA HO C'HERNIEL BET TANNED,

AG EUN DARN ALL HO DEVOA HO GUIN KAZI EVED,

NANN, NIKUN DEUZ ANNEZHE NE GUEMERE TAMM AON.

EVIT GUELOUT HO BREDEUR KOUSKET WAR AR WAISKAON.

HO C'HALON HE OA KARGUED GANT DOUE DEUZ AR FEIZ

HA CHOMM ATAO D'HA VEGAENN TOUESK BUGALE BREIZ,

DOUE DEUZ NEC'H ANN ENVOU HA REIZE ANNEZHE


RAK DOUE HA GAR ATAO, MER GOAR, E VUGALE.

D'HA EIZ HEUR DECZ AR BEURE EUR OUEZ HE OA CLEVED

HO LAVARAD : « REDIT ARAOG, REDIT ARAOG PAOTRED,

« DUONN, HA DREG AR VOGUER, HEMEDI AR VICTOR

« HO C'HORTOZOOUT HA C'HANOEC'H GANT HE BREUR AON HENOR .



# FALLAGRIES AR GOMMUN RU EN PARIS

*Var eun ton nevez.*

Mæstr an env, an douar, carguet a buissanc,  
Gret eur zel a drue da rouantelez Franç ;  
Nia a deu d'ho pidi a greïs hon c'halonno  
Da lacat eun termen da sia hon malheurio.

Franç eoa arrogant breman zo eur blaves,  
Hirie man en canvo hac en tristidigues ;  
Anaveout a ran cals deus a dud savant,  
Hac e zo estonet breman pe gomprenant

Penaus e zomp rentet bars en quen ber amzer;  
Ar lenne, dar c'houls-man, oamp gloriis a fier.  
Men ne non man ebet nemert eunn innoçant,  
Memes tra larin dec'h voar-ze ma zantimant :

Hon ourgouil zo quiriec mar gomp bet diskaret,  
Lennet an Aviel hag e cafet merquet :  
« Piou benac en em zav a vezò diskaret,  
« Nep e n'em huellaï a vo izelleet. »

Ar vanite e n'eus, d'eus e leïn, en Envo,  
Discaret Lucifer en creïs au tourmancho ;  
Ari oa bars en Franç quement a vanite  
Ne n'em soumette quen an eïl den dhe guile.

Dalec an huellan betec an izellan,  
Eur c'hemener, zo quen, n'eus quel goassoc'h 'vitam,  
Eur montr hac eur chaden stag eus toul e vrugou,  
Eur vez eo ho guelet gant eun dizac'her laou.

- \* Calz dioute a zeue enn tre pevar douged,
- \* Ha calz all ha lavare : Va Doue va mouged,
- \* Rac ma choman enn bue n'emm b'ho nemet poanion
- \* Calz goassoc'h evit ar he a zo eno Iverniou. »

Deuz drenchaden Huel-Bruk zistrojonn war ho c'his  
ENN trezec ha Gentilli, ha dostig d'ha Bariz,  
Ag he barz enn Gentilli p'ha ouien enn eur gaved  
Eun eur strinkjonn d'ann daoulion d'ha bedi aum Drinded.

D'ha bellad diwar hor bro ar woalen ha gasti,  
Kencoulz evel ar woalen ha zileun meur ha di,  
Ha goudeze ha bedjoenn ha galon vad Doue  
D'ha reï d'ho breudeur maro ar peoc'h enn guir Rove.

Cettu aze eun devez ag he laka c'huero  
Calonnou kement hini ha leze r'he varo,  
Eun darn leze kindirvi, eun darn all ho breudeur,  
Ag eun darn all mignoaned, Doue ! pebeuz goaleur.

Evel-ze tud Breiz-Izell noz ha de ha gleomp  
Pedi atao ann hini eun devez a velsomp,  
D'ha gass diwar hor ziez pell, pell ar brezel'lou  
Ha lac eun darn vraz ha dud d'ha skuill eur mor daelou.

Er goud arit coulz ha me n'enn deo ken ann douar  
Nemet eun draounien duoc'h vit ma zeo ar mouar,  
Dre aman ne veler ken, allaz ! nemet enkrez  
Ha calonnou disregued gant ar spern ag ann drez.

Nann, n'enn deuz nemet eul lec'h ag he never hevruz,  
ENN keïta ma ver emau ho veva malhevruz,  
Ag ar lec'h-ze zo anvet dre holl ar Baradoz  
All lec'h ma chomm ar Vamm vad ha r'ho demp he bennoz.

Ha bennoz war hor ziez atao he deuz scuilled  
Ha laked war ann hent mad meur ha hini colled,  
Meur a hini n'eur golled laea war ann hent mad  
Pa zaoulinonn dirazi, pa zaoulinonn timmad.

Evel-ze ha greiz calon he fedomp eb paouez  
Hi, he deveuz bet atao silaouet mad hor monez,  
Ag eun devez d'ha zonnet hevuz eun he c'hever  
Nimp ha ganno d'ha Zoue meuleudi eun niver !

**Vincent COAT.**

*Propriété de l'Editeur, J. H.*